

Vincent Coat (?)

Traou 'zo a zo diêz da lenn. Traou 'zo diêz da gompren.
Bet embannet e Montroulez, gand Hasle, e fin an XIX^{ved} kantved (?)

Bugale Breiz-Izel

War don galleg : *Ar Marseillaise*.

Redom, bugale Breiz-Izel,
Redom buan oll a-vagad,
Ya, redom hirio d'ar brezel ;
Ne glevit ket trouz an argad (*diou wech*).
An devez a zo 'n em gavet
Ma teu c'hoaz on enebourien.
Hag int stankoh evid merien
'N youhal gwalleur d'or haved.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

O ! pebez devez eo hemañ !
On enebourien a dosta,
Evel-se bugale bremañ
Skoom arne heb marhata. (*diou wech*).
Hirio tennom oll or hleze.
Or breudeur 'zo deuz or gervel,
Oll emaint o vond da vervel,
O vond da vervel, marteze.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

On enebourien villiget,
En o halon tan an Ivern
A zeu warnom ken kounnaret
Hag ar marh paour a za er spern (*diou wech*)
Ha war ze amañ pa zeuont,
En eur laza bihan ha braz.
Groom deze kaved o hlaz
Pe tehed kuit karget a spont.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)

Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.
Hogen arabad ez eo skei
Nemed ar re a ra dem poan,
Ne lzom ken nemed ar blei'
Rag hennez eo ankou an oan. (*diou wech*)
Hennez 'gleom dizalhbenna,
Evidom ez eo hep truez.
Evel se tro 'pad or buhez,
Lakom anezañ da grena.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
Da vond (*diou wech*)
Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Or banniel, bugale Arvor,
A gleom atao da zougen,
Eñ ez eo banniel an enor.
Sellit, evel an erh eo gwenn, (*diou wech*)
Ha bewech ma vez displeget,
An enebourien a weler
'Vel bleun, pa zeu ar gwall-amzer,
O plega o fennou mantret.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
Da vond (*diou wech*)
Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Eno, keit ha ma vezom en buhez
O diskarom hep kaved aon.
Arabad eo kaved truez,
O astennom war ar varvaskaon. (*diou wech*)
Sellit Konan Meriadeg
A zao hirio dimeuz e ve'
En eur lavared dem ive' :
« Dalit va hleze galloudeg. »

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
Da vond (*diou wech*)
Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Demeuz e vez e sao Gwesklen,
Ha war e gleze e lenner :
"Enor da Vreiz, ha torr e benn

D'he enebour, gwir marhenner“ ! (*diou wech*)
Hag en eur zavel e lavar :
« Redit, redit d'ar brezel oll,
Ha diskarit an dud diroll
A houzañv gand poan an douar ! »

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Klevit tud Breiz, Marzin, Arzur,
Daou zen demeuz an amzer all,
O lavared deoh a-dra zur :
« Tennit, tennit ar gwriziou fall. » (*diou wech*)
Ya, o zennit eta buan,
A-raog ma teuio an devez
Ma rankfoh anzañ en diwez
Evid atao, braz ha bihan.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Gwelit, an neñvo 'zo tanet,
Ar laboused 'chom hep kana,
Hag en douriou 'sav ar raned,
Ne reont ken nemed krena. (*diou wech*)
Allaz ! oll 'krenom hep paouez.
Gwelit, o fennou a blegont,
Keit ha ma zo tud divergont
O klask atao mouga or mouez.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Klevit, klevit ar hanoliou,
Ne reont ken nemed strakal
Keit ha ma halv an trompillou.
Deuz an daou du, d'ra hann, re all. (*diou wech*)
Evel-se 'tiskouezom deze
Ez om-ni bugale da Vreiz,
Ar vro e leh ma kaver feiz,
Doujañs Doue ha karante'.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Diskwelom 'karom or frankiz,
Ha kement tra 'ra vad an den,
Pa vom, tad-koz ha yaouankiz,
En eur ganna war ar blenenn (*diou wech*)
Rag 'in mar gallfen o lakaad
Da gousked en o liammou.
Bugale, tadou ha mammou,
Ha 'chomfem enne da gousked.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Ya, diskwelom ouzom mervel
Evid divenn atao or bro,
Or bro goz anvet Breiz-Izel.
Breiz-Izel, doaur an dero. (*diou wech*)
Evel-se anezi karom
Ha keit ha vom en buhez,
Hi 'zo eur vamm leun a druez
Hag eviti nim oll 'varvom.

Kemerom an armou
A zouge on zadou.
 Da vond (*diou wech*)
 Oll warneze
Heb kaoud aon, bugale.

Vincent Coat.